

GWIN PEÑSE, WHISKY GALORE HA KERMES AR VASKED

Ma zo bet buhezioù kollet er peñseoù (siwazh), korf hag all, zo bet ivez madoù savetaet ! Petra oa deuet gwin ar Vesper, e 1903, goude peñse al lestr-kargo eta ? Nebaon, ma oa bet graet war-dro ar paour-kaezh skipailh a oa war ar vag, ne oa ket bet dilezet ar gargamant gwin da vont d'an avantur Doue evit kelloù-se ! Sede penaos e kont an istor zo bet pourvezet gwin da arvoriz Leon eus Molenez betek Rosko e-pad meur a viz : netra lipousoc'h evit gwin peñse, sur mat ! Ha se en desped d'ar valtouterien.

Ha n'eo ket an istor nemetañ ouzhpenn : hon aodoù, goude bezañ kriz ha didruez a oar reiñ bod d'un died ken enorus hag an hini a vez tennet diouzh ar bec'hioù rezin bet o kreskiñ en broioù dindan un heol all ! Unan krasoc'h, sur-mat ! Ha neuze, pan vez dibarket evel-se, goude ur gorventenn kaset gant trouz spontus an avel, ha gant gwagennoù gouez ha divent, e vez soagn ha preder war ar barrikennoù dilezet en o flanedenn. Un drugar hag un teuzer evit gourlañchennoù arvoriz buket war toull ar varrikenn, dieubet ! Ha pan vije ur varrikenn didalet bennaket en o mesk !

Sede, savetaet ar vartoloded, miret an enor ha tapet ur bennozh gwinek ! Kollet korf hag all zo ivez frealziñ korf hag all !

Istoriou, mojennoù, danevelloù, kontadennoù all zo evel-se er bed a-bezh. Evit gwir, e kement lec'h ma teu ar mor da boket pe da vriata rust douar an den.

A-wezhioù e c'hall ar peñse bezañ tremen ekologel. Penaos'ta ? Dont a ra din da soñj ar romant fentus, plijus savet gant Compton McKenzie : Whisky Galore, zo evit Tregeriz Wiski Sofkont ! Ur film zo bet tennet diouzh ar romant, ur film da sellet outañ gant ur voutailhad wiski mat en astenn e vrec'h, war an daol e-kichen e ganape staliet dirak ar skramm ! Livioù blaz ha c'hwezh ar wiski a zimez kaer gant ar film gwenn-ha-du.

Ekologel a lâren, e-serr un amredad berr (« circuit court » mar kavet gwell) a vefe reishoc'h : sede eo diazezet war istor ul lestr-kargo leun a voutailhadoù wiski aet a-benn kerreg un enezenn vihan a Skos, en Hebridez, nepell diouzh ar strilherezh ! Se a oa da goulz an eil brezel-bed, ur c'houlz ma veze tailhet berr d'ar boblañs. Ur wezh c'hoazh savetaet skipailh al lestr, un digarez, moarvat, da lakaat aezetoc'h an arigrap war ar wiski manet e kof ar vag !

An istor a gont penaos e voe klozet peuboù an enezenn e-pad meur a vloaz ! Ken diezhomm ma oant deuet da vezañ, hep ankouaat penaos e voe, evel-se, erbedet meur a wenneg kontouer !

Met petra oa deuet ar vuhez sokial da vezañ ? Se zo un afer all avat...

Ar C'hrompton a lavar en devoa tapet soñj e romant diwar danevelloù meur a wiski peñse all. Hag e grediñ a c'haller ober !

Dont a ra da soñj din ivez danevell ur peñse all a oa bet kontet din un tregont vloaz zo en Euskadi.

Hervez lavar an dud e oa bet ur peñse gant ul lestr-kargo en trowardroioù aodoù Bilbo, lec'h zo kerreg ha traezennoù bihan. Peñse, n'eo ket sur, met kollet en devoa meur a gontener leun a votoù... Met ar gargamant a oa bet dispartiet etre ar botoù dehoù hag ar botoù kleiz !

Sede arvoriz Bilbo a dapas lod dehoù ha reoù all lod kleiz ! Peadra da blijañ da dud ungarek !

Ha sede ma voe divizet sevel ur c'kermes ar botoù deuet a-ziwar ar mor : kouviet ar reoù o devoa tapet ar stummoù dehoù hag ar reoù o devoa tapet ar stummoù kleiz. Hervez ma mignon kozh Marsel (Doue d'e bardono), en devoa bevet ar c'hoari bras-se, e oa bet plijadur, c'hoarzh... ha dipit, rak botoù zo a oa manet hep o far ! Ne oa ket bet adpakat kement kontener a oa ! Gwir, gaou, danevell Marsel ? Din-me eo gwir !

Tout se reolennet en Breizh gant lezennoù strizh, fin... hervez kont. Etre gwaloer ha lagan emaint, termenoù a-gozh. Evel ma lârf e ur mignon mat din : emañ ar blijadur etre ar Whisky Galore hag ar Gwin Gwaloer !

Herve Bihan

Levrlennadur

Compton McKenzie, Whisky à gogo (Whisky Galore), Paris, 1950.

Guy Boucher, Naufrages aux abords de l'île de Batz – Du droit de bris aux sociétés de sauvetage, Librinova, 2023.

Emile Boutin, La Baie de Bretagne et sa Contrebande – Sel, Vin, Tabac, Indiennes, Edit. Siloë, 1993.

Lec'hiennoù

Kinnig ar film Whisky Galore :

<https://www.dailymotion.com/video/x8htbm9><https://www.dailymotion.com/video/x8htbm9>

Devri, ar gerioù « gwaloer » ha « lagan » :

<https://devri.bzh/dictionnaire/g/gwaloer/>

<https://devri.bzh/dictionnaire/l/lagan-2/>

Diwar-benn ar gwaloer pe al lagan :

https://fr.wikipedia.org/wiki/Droit_de_bris

Pennad Ouest-France diwar-benn botoù kouezhet a-ziwar ul lestr-kargo :

<https://www.ouest-france.fr/leditiondusoir/2019-06-20/de-la-bretagne-aux-bahamas-des-centaines-de-chaussures-sechouent-sur-les-plages-650f9442-9832-4274-83e6-b97cc9645b9e>